

**Dir-na-Dor**

Yves Charles Marie Le Moal (Koadoud 1874 – Koadoud 1957)  
Modernnaet eo an bet an daoie-skriva.

**Taolenn**

Mouez siminal an ti kouezet.  
Ar pistiklaou hag ar gweneried.

## Mouez siminal an ti kouezet

« Me ‘oe siminal eur hoz ti,  
Savet gand koz vein ha koz pri.  
Nan on nag uhel na ledan ;  
Anzav a ran heb aon na mez,  
Aliesoh ‘m-eus santet c’hwez  
A bato<sup>1</sup>, kig sall ha krampouez  
Evid a gig rost hag amann.

Koulskoude gwechall, da goulz noz,  
An oll dorjou serret kloz,  
Troid en oaled ha penn en êr,  
Me a lare ba beb unan :  
“Amañ ‘zo<sup>2</sup> tud, amañ ‘zo tan,  
Ha ‘vid pep kristen<sup>3</sup> degemer.“

Nag a baour kêz am-eus tommet,  
Dindan ma mantell vogedet,  
E-pad nozveziou skorn ar goañv,  
Ha ped ha ped a wennili  
‘Zo deut da houl’ neizañ ganin,  
D’an nevez-amzer ha d’an hañv.

Kontadennoù ha soniou koant,  
Am-eus klevet ivez dre gant,  
Pa oa Fañch an Ti-All o ren,  
Beb noz, en korn ar fornigell,  
Gand e gorn<sup>4</sup> berr hag e skudell,  
War-horre ar chipot-holen<sup>5</sup>.

An noziou-ze, an dud dilerh<sup>6</sup>,  
Deuz ma fenn goloet a erh,  
‘Wele fulennoù o strinkañ,  
Ha furm teuziou ha lutuned,  
O nijal e-touez ma moged,  
Da lakaad ane<sup>7</sup> da spontañ.

Gwelet ‘m-eus stagañ ‘n drêzenn-bod,  
Gwelet ‘m-eus devi meur a skod,  
Da Nedeleg gand kalz a fe<sup>8</sup>,  
Tra ma tremene peb rumm tud

---

<sup>1</sup> bato ; “pato“, avalou-douar.

<sup>2</sup> ‘zo : tregerieg : ez eus.

<sup>3</sup> kristen : den.

<sup>4</sup> e gorn : e gorn-butun.

<sup>5</sup> ar chipot-holen : eur skaoñ evid lakaad an holen e-barz.

<sup>6</sup> an dud dilerh : an dud a oa chomet diwezad er-mêz.

<sup>7</sup> ane : aneze.

<sup>8</sup> fe : feiz (evid rima gand “ne“)

O buhez amañ, kuit a vrud,  
'Vel moged o sevel en ne<sup>9</sup>.

Eur zoñj e' kement-se bremañ ;  
Na ton, na zon mui ne glevan,  
An ti koz paour a zo deut mud,  
Beteg ar skrill a zo tavet,  
Maro gand riou 'n korn an oaled,  
Ha me ne glevan ken kammed,  
Nemed mouez kriz an avel yud.

---

<sup>9</sup> ne : neñv.

## Ar pistiklaou hag ar gweneried<sup>10</sup>.

Eun devez eul lapous bihan,  
Eur pistiklaou euz ar vro-mañ,  
A 'n em gavas souezet-braz,  
(Nebeud a oad e-nevoa c'hoaz)  
O weled o tond 'barz ar vro  
Eur bagad evned disano :  
« Mamm, emezañ, piou ar re-ze,  
Gwenn dre zindan, du war horre,  
A zo du-hont war lein an ti  
O kanañ hag oh ebati ? »  
An hini goz a respontas :  
« 'Re-ze 'zo tud a wrienn<sup>11</sup> vraz,  
Gweneried, tud en o êz,  
A zeu 'pad an hañv war ar mêz,  
Hag a dremen ar goañv en kêr,  
Pell ahann, 'n eur vro tomm ha kaer. »  
-« Mond a refom gante on-daou,  
Mamm-goz ? », eme ar pistiklaou..  
-« Ma mabig, diwallit ervad  
Na deufeh biken d'am huitaad !  
Pe na ve yen, pe na ve tomm,  
Pep hini 'n e neiz a gle chom ! »  
Koulskoude al lapous bihan  
Euz ar respont ne reas van ;  
Aliez, e-leh labourad  
War e neizig 'barz ar bern koad,  
'Chome 'vel eun evn souezet  
Da zell' ouz ar gweneried,  
O soñjal, digor e henou :  
« Na me 'garje bezañ aotrou,  
Evid galloud prim-prim nijal,  
Ober ma neiz er siminal  
Ha moned en kêr 'pad ar goañv  
'Leh chom 'mesk ar plouz da skornañ ! »  
Ar vamm-goz paour, o weled se,  
A brezege dezañ bemde',  
Mez kaer he-doa, ar fistiklaou  
Ne deurveze mui he selaou.  
Chom 'reas an treo<sup>12</sup> evel-se  
Beteg eun devez d'ar beure  
'M-oa klevet eur gweneri koz  
O lared : « Hirie, a-raog noz,  
Bugale, e vo red skampañ,  
Rag hebdale e teuy ar goañv,  
Pa larin : kuik ! 'teufet raktal,

<sup>10</sup> Ar pistiklaou hag ar gweneried : Ar pennduiged hag ar gwennilied.

<sup>11</sup> a wrienn : a wrizienn. Tud a ouenn vraz.

<sup>12</sup> treo : tregerieg : an traou.

Oll emberr war ar siminal ! »  
Ar pistiklaou a oa laouen :  
« Achu, ‘mezañ, ma finijenn ! ! »  
Ha da zerr-noz, pa glevas : kuik,  
Hag eñ ‘mêz e neiz... Ar paourig !...

\*

Eur beure deuz a viz Genver,  
Teñval an neñv, yen an amzer,  
Eur pistiklaou ‘oa o ouelañ,  
Hag e dreid skornet dindannañ,  
War lein eun ti e-barz ‘n eur gêr,  
Kollet e hent pell deuz ar gêr.  
« Siwaz ! ‘mezañ, n’hallan mond ken,  
Ma askell skuiz, ma halon yen,  
El leh-mañ ‘vo red din mervel !...  
Kenavo ! ma bro Breiz-Izel !  
Kenavo ! ma mamm-bistiklaou,  
Ha n’am-oa ket prizet selaou !

\*

Siwaz ! ma vijen-me bet fur,  
‘Vijen ket amañ a-dra-zur !  
O ! berniou plouz, o ! berniou foenn,  
‘Leh ‘vijer kern tomm treid ha penn !

\*

O ! du-hont en Breiz, ma neiz kloz,  
Bet savet gand ma zadou-koz !... »

\*

Skuill a ra eun nebeud daero’  
Hag ar pistikalou ‘zo maro,  
Ruill a ra diwar lein an ti  
E gorr d’ar hizier da zebri.

#### KELENNADUREZ

Pa ne ve yen, pa ne ve tomm  
Pep hini ‘n e neiz a gle chom.